

AN
TREDE AMPREST
BREZEL

*« Me gred start e respounto an holl dud
d'hor goulen. Kement hini na fellfe ket d'ezo
presta o arc'hant, a zalefe divez ar brezel
o chom hep rei, dioc'htu, d'ar vro, an tu
da drec'hi. »*

(Prezegen an Aot. KLOTZ, Ministr an Dispignou,
da Gambr ar Gannaded.)



PARIS
MOULEREZ AR VRO

1917

AN
TREDE AMPREST
BREZEL.

*Mui ken a gomzou flour
mes niverou ha traou gwir.*

DAOU C'HER ARAOK.

Fur eo enklask kement se. — Pep hini a oar vat eo karet start Bro C'hall gant pep Gall mat : ar galon estlammus a ziskouez hag o deus diskouezet hor c'henvroidi, ar re vihana anezo zoken, o tifenn ar vro, ar maro enorus o deus gouzanvet kemend all a dud vrao, a laka ar wirionez se da lugerni evel an heol. Miromp anezi 'ta e goueled hor c'halon.

A hend all, pep hini ac'hanomp, evitan da gaout doujans ar vro beteg ar maro, mar bez red, en deus ar gwir, evelato, da zellet ouz e vad e unan. Ne gerz ket ar bobl Gall evel eur waz, mez evel eun den. Kerzet a ra pa vez displeget d'ezi perak e tle kerzet ha pa vez diskouezet d'ezi brasder ar zonzj a laka anezi da gerzet. Evelse eo ema ar gounid ganeomp.

Neuze 'ta, da gomz hirio diwar-benn an amprest, lekeomp a gostez ar c'homzou flour ha komzomp evel ma ra an dud evit o marc'hadou pe, welloc'h, evel pennou tiegez fur, a gav d'ezo ne ra morse daou ha daou nemet pevar hepken.

DIWAR-BENN PETRA AN AMPREST?

Petra eo Bro C'hall diwar-benn an arc'hant? — Setu aman ar goulen kenta: Perak 'ta e c'houlen Bro C'hall arc'hant, ha perak 'ta e c'houlen dek kweach mil million?

Abarz m'hel livirin, red e vezo, a gav d'in. lavaret petra eo an dra vras se, n'en deus ket a gorf, mez eun ene ker kaer, hag a vez great anezan « Bro C'hall ».

Bro C'hall, gwir bater eo, n'eo ket eun den. Hogen ne d-eo ket kennebeud eur gouarnamant, ha n'ema ket kennebeud e tu hini ebed. Eur ger eo, eur ger leun a c'hloar, a fell d'ezan lavaret ar C'hallaoued a bez, n'eus fors piou e vent, o kaout holl eun hevelep mennoz a bouez bras bras, da lavaret eo: Dirak lontregez an Alamaned red eo d'eomp *beva a darre pe vervel*, na muioc'h na nebeutoc'h; n'eus ket da varc'hata.

An eil dre egile. — Rak se pa vez lavaret e ra Bro C'hall eun amprest, klevit mat petra eo: Ar C'hallaoued holl eo, daou ugent million anezo, holl a bez, bihan pe vras, a ro kred evit an arc'hant se, pep hini war e vadou e unan. Mar prestit hirio kant lur, ha pa ne ve ken, da Vro C'hall, ni Gallaoued eo, ni holl eo a zo lekeat da gred evit hoc'h arc'hant. Gwelomp ar wirionez tal oc'h tal: kred ar gouarnamant, hirio, n'eo ken tra nemet madou an holl dud a bez. Pep hini eo a brest d'an holl; an holl eo a ro kred da bep hini.

Mat; Bro C'hall a amprest; ar C'hallaoued a amprest. Daoust petra?

C'houi her goar kerkouls ha me.

Ni a amprest, ar Zaozon hag ar Stadou Unanet a amprest evit prena ha paea an armou, an dilhad, ar boed a zo red d'eomp evit beza trespac'h, gant skoazel ar re Unanet, d'hon

enebourien. Ar re ze, evel m'em eus lavaret, n'o deus ken sonj nemet laza ac'hanomp pe lakaat da sklaved ar re a vije chomet beo. Kemeret e prest 'ta n'eo ken tra nemet rei armou ha nerz d'hon difennerien.

Oc'h ampresta e lekeot ive da vont en dro al labour a zastum evidomp mil ha mil dra, al ler, an ed, an eol-mean, ar zukr, ar gloan, ar c'hafe, ar glaou, ar c'hoton, ha me oar me? Oc'h ampresta e lekeot oc'hpenn da vont en dro evit mat ar skoazel a zo red d'ar re vac'hagnet ha d'an emzivadeg, ar pez n'eo nemet dlead ar santela Bro C'hall en o c'henver.

Arc'hant nevez hag arc'hant koz. — An amprest a vezo dek kweach mil million e dalvoudegez. Evit gwir, ar gouarnamant ne fell ket d'ezan kaout en e zourn eur bern arc'hant nevez ker bras se. Awalc'h eo evitan gant diou weach mil million. Evit ar pez a jom oc'hpenn, da lavaret eo eiz gweach mil million, eun dra all eo a ra. Goulen a ra digant an dud digas d'ezan Bilheji Difenn ar Vro ha paperiou leve 3 1/2 dre gant.

Ar paperiou ze, roet gwechall d'an dud o devoa prestat o gwenneien d'ar Vro, a c'hello beza roet d'ar gouarnamant, gant an dud, evit paea al leve nevez 4 dre gant a fello d'ezo prena. Kement se a vezo displeget gwelloc'h c'hoaz bremaik.

An dra ze a blij, war eun dro, d'an dud ha d'ar gouarnamant. Ar gouarnamant ne jom gantan nemet eur seurt dle hepken, eleac'h daou, hag an dud a zo brasoc'h o c'hampi⁽¹⁾.

ARC'HANT DA C'HOUNID D'AR RE A BRESTO.

E hano. — Amprest ar Vro 1917 a vezo great gant paperiou nevez a c'halver al leve 4 0/0 (pevar dre gant).

(1) Al leve 3 p. 0/0, pa dalv 60 lur a ro 5 dre gant.

Bilhed Difenn ar Vro, a ro 5 dre gant.

Al leve 5 p. 0/0, pa dalv 83 lur, a ro 5.88 dre gant.

Al leve nevez 4 p. 0/0, pa dalv 68.60, a ro 5.83 dre gant.

Evelse ma vije prenet ganeoc'h ar paper ze evit kant lur, hoc'h arc'hant a vije lekeat da dalvezout evit pevar dre gant, p'eo gwir e vije roet d'eoc'h c'houezek real pep bloaz.

Talvoudegez ar paper ze eo kant lur ha kampi al leve eo pevar dre gant mar d'eo gwerzet ar paper leve evit kant lur.

Priz gwirion. Gounid bras. — Hirio avat, ar paper leve ze ne dalv nemet eiz lur ha tri ugent ha daouzek kweneg. Evelse, evit kaout pep bloaz ho c'houezek real leve, n'eo ket red rei-kant lur, mez eiz lur ha tri ugent ha daouzek kweneg hepken. Hoc'h arc'hant a vezo eta lekeat da dalvezout ne ket evit pevar dre gant mez evit c'houec'h dre gant, pe dost, da lavaret eo evit ugent real ha tri santim ha pevar ugent (5 fr. 83).

Ouspenn, eun deiz pe zeiz, pa vezo deuet adarre an eurusded, al leve ze a ielo nebeud a nebeud war greski bete kant lur⁽¹⁾. D'an deiz se oc'hpenn m'ho pezo digemeret c'houezek real leve peb bloaz, hoc'h eiz lur ha tri ugent ha daouzek kweneg o devezo great bugaligon kouls lavaret, p'eo gwir e roint d'eoc'h da c'hounid frank eul lur ha tregont hag eiz gwenneg. Mat, mar hoc'h eus gelllet lakaat hirio dek mil lur en amprest, ho pezo digemeret pep bloaz pemp kant tri ha pevar ugent lur, mes d'an deiz ma vezo eat ho paper leve beteg e wir dalvoudegez, e c'hellot e werza raktal evit pevarzek mil pemp kant seitek ha tri ugent lur.

Kuit a daillo. Kemm ebed abarz pemp bloaz warnugent. — Ne ket echu; lavaret a c'hellit, evel just : Brao eo, komzou kaer ! Mez ankounac' heat hec'h eus ar gwiriou a zeujo, hep mar ebed, da goueza war va leveou.

(1) Beo c'hall he deus lekeat e werz, e 1830, eul leve pevar dre gant hag a badas bete 1887; al leve ze, e 1835, oa kant lur e dalvoudegez, ha seiz lur ha kant e 1840. Gwelet a roer, neuze, e c'heller alies gounid gant ar zeurt leveou ze.

Mar teu, eun deiz pe zeiz, eur gwir a bevar real war va leve, ne ket ugent real ha tri santim ha pevar ugent eo, mes c'houezek real hag eiz gwenneg, pe dost, a zigemerin hepken. A hend all, d'an deiz benniget ma kemero va zamm leve e dalvoudegez holl, ha, kent a ze, mar teu da greski kalz muioc'h c'hoaz, evel m'eo c'hoarvezet e bloavezh 1840, daoust hag e c'hellit toui d'in na droko ket ar gouarnamant va zamm leve oc'h eul leve all hag a vije disteroc'h ?

Dre eun eur vat, n'hoc'h eus ket ezomm da gaout aoun war ze, p'eo gwir, da genta, e tou ar gouarnamant ne lakaio da viken na gwiriou na taillou war al leve 4 % ha d'an eil, e tou ive ne vezo troket kennebeud ar paper leve ze epad pemp bloaz warnugent.

A hend all, e peb amzer e c'hellot gwerza ho leveou evel ma plijo d'eoc'h. Ar gouarnamant a ro hepken e c'her e lezo d'ho leve, epad pemp bloaz warnugent, an doare en doa pa 'z eo bet prenet ganeoc'h.

BEVENNÈREZ AN AMPREST.

Dek kweach mil million ha netra ken. — Ar gouarnamant ne c'houlou hirio nemet dek kweach mil million. Neuze, sklear eo, ne roio ket d'an dud paperiou leve evit eun dalvoudegez brasoc'h.

E wir striz eo. Mar hoc'h eus ezomm da c'houlou ugent lur, e prest, digant eur mignon d'eoc'h, den ebed ne deus ar galloud d'ho lakaat, dre heg, da zigemeret digantan daou ugent, hanter kant pe gant lur, a lakafe ho tle da veza kalz pouneroc'h.

Hak se, ar gouarnamant, mar fell d'ezan goulou dek kweach mil million ha netra ken, daoust ha ne c'hellot ket ar C'hallaoued digas d'ezan kement a arc'hant hag a blijio d'ezo ? Eo da, mez ar skiant vad a zispleg kement ma : Pa vezo digaset d'ar gouarnamant arc'hant an holl, pa vezo

great kount an arc'hant se a bez, ma kaver muioc'h a arc'hant eget n'eo bet goulennet, red e vezo ranna. An hini en devoa prestet evit kaout pemp kant lur leve, ne vezo roet d'ezan, marteze, nemet tri c'hant hag hanter kant pe bevar c'hant lur hepken. Kement a arc'hant a jomo oc'hpenn a vezo distaolet dioc'htu d'ezan.

Eun enchiez eo, gwir eo, beza prestet eur bern brao a wenneien evit o lakaat da dalvezout ha gwelet ne jomo da dalvezout nemet eur bernig. Mes petra da ober?

Fellet eo bet d'ar Ministr en deus sinet al lezen diwar-benn an amprest, ober vad d'ar bresterien vihan. Hag, a zo gwell, roet en deus d'ar re all an tu da lakaat o danvez holl da dalvezout hep na vije bihanaet o c'hinnig.

Etre c'houezek real ha tri c'hant lur leve. — Gourc'hennet en deus, da genta, ma vezo digemeret a bez, hep na c'hellfed e vihanaat, kement bern arc'hant mouneiz pe vilheji a vezo red da baea evit kaout tri c'hant lur leve, ar pezh a ra eur bern arc'hant 5145 lur da hirra.

D'an eil en deus roet e asant evit ma chomo ive, hep beza bihanaet, kement goulennet a vezo paet gant Bilheji Difenn ar Vro pe gant paperiou leve 3 1/2 dre gant. Evit ar bresterien ze ar gouarnamant a zigemero, evit paea leveou an Amprest nevez ar bilheji hag ar paperiou ze ha pa ve zoken o zalvoudegez brasoc'h a bez eget eiz gweach mil million.

Ouspenn, ne ket diez diskouez, en eun doare all c'hoaz, en deus bet c'hoant ar Ministr da lakaat ar ialc'hadigou ar re vihana da c'hounid gant an Amprest :

Ne zigemer ar gouarnamant bern arc'hant ebed bihannoc'h eget eiz lur ha tri ugent ha daouzek kwenneg, ar pezh a ra c'houezek real leve; gwir eo. Mes ne ket red d'oc'h presta hoc'h arc'hant dre dammou a c'houezek real leve, evel pa lavarfed dre bevar, eiz, daouzek, c'houezek lur leve. Nan-

Gwir hoc'h eus da brena pemp, c'houec'h, seiz, pemp warnugent, tri ha tri ugent lur leve, ar pezh a gerot.

Evelse 'ta, ar berniouigou arc'hant ar re vihana a c'hell kaout o leac'h en Amprest, ha meur a zad, a gav d'comp, a reio d'o bugale vihan o zammig leve en Amprest brezel 1917.

AR RE NA BRENINT KET AL LEVE NEVEZ.

Ema Bro C'hall oc'h ober he zrede Amprest evit ar brezel. Skritellou an Amprest a zo bet staget ouz ar mogerioù. Daoust ha digas a raio holl ar C'hallaoued o gwenneien d'an Amprest, ar re ze nebeud, ar re hont kalz? Nan avat.

An darn vuia eus ar C'hallaoued a zigaso d'ar gouarnamant o gwenneien, dre ma wel sklear an darn vuia ze ha dre ma 'zeo lemm e spered. Eun niver vihan a dud a jomo hep hen ober. Bez' ez eus daou seurt tud anezo; eun touladig tud klanv o sperejou, eur vanden vras tud aounik.

Ar re genta a zo henvel ouz an dud klanv se a gav d'ezo, daoust da vennoz o medisin, ne c'hell ket poull o c'haloun dougen boed ebed, ha neuze mervel a reont gant o naoun.

Evelse, pa vez great eun amprest, tud zo hag a vir, hep ober netra, o ialc'had arc'hant. Gouzout mat a reont e raje, o frest, kalz a vad d'ar vro, ha koulskoude, p'en em ziskouez, dirak o daoulagad, eur skritell bennak diwar-benn an amprest, serra a reont dioc'htu dor o armel gant an alc'houez.

Perak? abalamour d'unan bennak e touez ar pennou bras ha ne blij ket d'ezo; evit eur gomz diskiant bennak. Hini ebed eus an dud reuzeudik se ne deus diou askell krenv awalc'h evit nijal a uz d'an traou dister ze. Hini ebed anezo ne wel ez eo Bro C'hall, ez eo ar vro a c'houlenn skoazel diganto. Truez outo!

Ar re all a jom en eun disfizians vras diwar henni an amzer da zont; an dud spountik se a lavar, alies : Piou oar ar peza c'hoarvezo? Pa vounter eun tammig krenvoc'h outo, lavaret a reont, izel o mouez : Koulskoude... ma vije trec'het Bro C'hall!

Ni avat, a vouez huel, lavaromp d'ezo daou dra gwir : da genta, pa vije trec'het Bro C'hall, holl zanvez an dud se, n'eus fors penaos e rajent, pe evit e virout, pe evit e guzat, a vije kollet evit mat ha da viken. D'an eil, gounid ar re Unanet, hag a c'hoarvezo sklear evel an heol, ne zeuio dave-domp nemet gant ar skoazel a vezo roet d'e vro gant pep hini ac'hanomp. Feiz ! mar chom o sperejou serret dirak eur wirionez ken lugernus, truez outo ive, ha deomp kuit.

PENAOB DIGAS E ARC'HANT D'AN AMPREST.

Eun dra ker bras hag eun amprest o c'houlenn dek kweach mil million a zo diez kenan d'hel lakaat da vont en dro. Mes lavaret a c'hellomp da bep hini ar peza en deus da ober evit goulenn ha kaout e dammig leve.

Peur? — An amprest a vezo digoret abaoe al lun 26 a viz du, da vintin, beteg ar zul 16 a viz kerzu, d'an noz. Na c'hortozit ket. Grit ho traou hirio; n'eus ket a amzer da goll.

Pe leac'h? — El leac'h ma kerot, e ti tenzorier kenta an departamant, e ti an densorierien all, e ti digemerer ar gwirion, e ti Bank Vro C'hall, e ti ar varc'hadourien arc'hant, e post al liziri, e ti paotr gwirion an douan, e ti an notered.

Mar d'eo eta ho leac'h chom pell dioc'h ar voure'h, pell dioc'h post al liziri, en em glevit gant paotr al liziri, ar faktour. Henez a lavaro d'eoc'h petra da ober.

Kount an arc'hant. — Ar prest bihana a c'hellit ober, hon eus hel lavaret, a roio d'eoc'h c'houezek real leve a vezo paeet d'eoc'h epad ar bloaz, peder gweach, pep tri miz. Evit kaout pevar real leve oc'hpenn, red e vezo d'eoc'h lakaat seitek lur ha tri gwenneg war an eiz lur ha tri ugent ha daouzek kwennek hoc'h eus paeet da genta. Da gaout eta ugent real leve, red e vezo d'eoc'h rei pemp lur ha pevar ugent ha tri real; hag evelse penn da benn.

Evelato, mar plijfe d'eoc'h paea nebeud a nebeud, e leac'h paea an holl en eun taol, red e vije d'eoc'h paea dre dammou leve a c'houezek real e leac'h paea dre dammou leve a bevar real. Evelse, mar paeit raktal an holl, paea a c'hellit daon lur ha daou c'hant. Mes mar kavit gwelloc'h paea nebeud a nebeud, ne c'hellit paea nemet daou c'hant lur pe bevar lur ha daou c'hant, dre ma ne c'heller ket ranna daou lur ha daou c'hant dre bevar. Kement se zo het gourc'hemenet evit ma vezo ar c'hount easoc'h eun tammig.

PENAOB E C'HELLER KAOUT AL LEVE.

Kement a c'houlennit ho pezo. — C'houi a fell start d'eoc'h e vezo roet holl d'eoc'h al leve hoc'h eus goulennet.

Mat; mar hoc'h eus goulennet oc'hpenn tri c'hant lur leve, paeit ne ket gant arc'hant, mes gant bilheji ha paperiou Difenn ar Vro, ha gant paperiou leve 3 1/2 dre gant. Ar paperiou ze a zo anat o zalvoudegez hag e vezo roet d'eoc'h an dalvoudegez se⁽¹⁾.

⁽¹⁾ Bilheji Difenn ar Vro a ro 5 dre gant. E kaver anezo-da brema digant digemererien ar gwirion, digant ar varc'hadourien arc'hant, e ti post al liziri. Roet int raktal. Bilheji zo hag a dalv 5, 20, 500, 1,000 lur evit tri miz, c'houezek miz ha bloaz. Skrivet eo war ar bilhed peur e vezo distaolet e dalvoudegez. Pa vez ochu an amzer'ta, e c'heller dibab, pe neveri ar bilhed, pe c'houlenn an arc'hant.

Al leve 3 1/2 dre gant a vezo digemeret evit an dalvoudegez en devezo, pa vezo great ar c'hount, d'ar c'houezekvet dervez a viz kerzu a zeu.

Lekeomp ho pije bilheji Difenn ar Vro a dalvezfe kant lur leve. Paeet hoc'h eus ar bilheji ze daou vil lur. P'eo gwir ne dalv kant lur leve 4 o/o nemet 1715 lur, trokit. Gant an 285 lur a vezo lezet d'eoc'h prenit c'houezek lur leve 4 o/o. Ar c'houezek lur leve ze a gousto d'eoc'h 274 lur 40. Ho pezo neuze c'houezek lur leve oc'hpenn hag e chomo ganeoc'h dek lur ha daouzek kweneg.

Rakse, en tu all da dri c'hant lur leve, na roit ket arc'hant mes paperiou leve d'ar gouarnamant. Mar hoc'h eus anezo hag a vije eat da get, kerzit buhan d'o nevezi, araok ar c'houec'hvet dervez warnugent a viz du. Ma n'hoc'h eus ket anezo, kerzit buhan d'o frena, araok ar c'houec'hvet dervez warnugent a viz du⁽¹⁾. Ma ne vije ket bras awalc'h talvoudegez ho paperiou leve evit paea, e tlefec'h paea gant arc'hant ar pez a jomfe oc'hpenn.

Kement a c'houlennit n'ho pezo ket. — Mar hoc'h eus goulennet eul leve brasoc'h eget tri c'hant lur leve ha ma paeit gant arc'hant e leac'h paea gant paperiou leve, al leve a c'houlennit a c'hello beza bihanaet.

Koulskoude, talvoudek eo d'eoc'h en eun doare, paea gant arc'hant, rak e c'heller, neuze, paea eul loden dioc'htu hag al loden all d'ar pemzekvet dervez a viz mae a zeu, d'an divezata. Paea a reer, neuze, e diou weach, pe e peder gweach, evel ma plijo d'eoc'h.

Neuze avat e tlefec'h paea raktal ken alies a zaouzek lur hag a c'houezek real leve. Ar pez a jomo oc'hpenn a vezo

paeet divezatoc'h. A hend all, mar plij d'eoc'h, e c'hellot paea an holl araok an termen.

Traou kemmenet ker mat a ro d'eoc'h an tu da gemeret eur bernig brao leve, ha pa ne ve ken ganeoc'h, dioc'htu, nemet eun nebeud arc'hant. Likiit en hoc'h armel, epad c'houec'h pe zeiz miz, eun tammig eus ho kounid bemdez ha digasit an arc'hant se d'an amprest da viz mae a zeu. Evelse ho nerz hag ho furnez a lakaio da greski ho leveou.

An amprest evit an holl. — Gwelet a rit, breman, evit mat, ar pez an eus lavaret d'eoc'h. An amprest a roio eur gounid d'an holl, n'eus fors pegen treut e vo ialc'had o gwenneien.

Ni, micherourien ha labourerien a zo, holl war eun dro, eun nerz eus ar re vrasa evit ar vro. Pet ac'hanomp ni, gant an amprest, en em gavo hep dale, da gaout arc'hant diwar o leve?

ARAOK KLOZA.

Bro C'hall trec'her a grenn. — Sellet a reomp aman ouz ar brezel diwar-benn hor ialc'hadig arc'hant ni. Goude ar brezel avat, penaos e ielo ar bed gant hon madou, gant madou hor bugale?

Eun dra zo, unan hepken, ma rankomp sellet outan. Red eo, kousto pe gousto, e vezo gounid ar brezel ganeomp; trec'herien a grenn e rankomp beza. Sankomp douar ar mennoz se en hor penn; ne vezo ket biken kementse lavaret hag aslavaret awalc'h. Korvigellou ha troidellou ne dalvont netra : ema ar c'hoari etre ar vuez hag ar maro!

Hor bara hag hor buez. — Mar d-eo trec'het Bro C'hall, da netra eo ez aimp holl, pe vras pe vihan. An holl vadou, evito da veza kuzet e Bro C'hall, kuzet e broiou pell, din-

⁽¹⁾ Al lezen a zispleg sklear n'eo hano aman nemet eus Bilheji Difenn ar Vro prenit pe nevezet araok digor an amprest.

dan an douar, dindan an dour, a vezo paket gant ar Voched da bac'a o dispignou brezel. Epad hanter kant vloaz, mar-teze, ni, hor bugale hag hor bugale vihan a labouro evel sklaved da bac'a ar millionou hag ar millionou a c'houlenn'o ar Voched diganeomp. An intanvezed, ar re vac'hagnet, an divroidi digemeret ganeomp, ar re a garomp evit o foanion, ar re ze holl a varvo en eun dienez spountus. Ha ni, siouaz! D'eomp ni, pa vijemp trec'het, gwelloc'h kalz e vije mervel raktal kentoc'h eget beva goude gounid ar Voched.

Beza treac'h ha netra ken. — Mar teu ganeomp da veza hanter drec'her hepken, mar teu d'eomp neuze eur peoc'h kamm, goude skuïder an holl, ni holl, evel hon eus lavaret aman hueloc'h, a vije kollet da viken hor madou, abaoe ar pinvidika beteg ar paoura. Den ebet ne zistaolfe d'eomp hon dispignou brezel ker bras; den ebet ne lakafe da zevel eus a varo da veo hon unnek departamant dismantret. Den ebet ne rofe d'eomp peadra da lakaat adarre da vont en dro hor c'hemm-werz ha labour hor stalion bras; den ebet ne rofe eur skoazel bennak d'ar re lekeat, gant ar brezel, en eur stad ken reuzeudik.

Tud paour! Eur peoc'h kamm a c'houlennit! Mat; ho kwalleur eo a c'halvit. Neuze 'ta e vije red da Vro C'hall digeri he gwazied, ha Bro C'hall, daoust ha n'eo ket eun tammig ac'hanomp ni Gallaoued?

Rakse, c'houi hag a lennit al leorig ma, hoc'h holl vadou eo, va holl vadou eo a vezo rannet etre holl. Hag eun nebeud anzer goude, an enebourien, pareet buhanoc'h egedomp, dre m'o deus miret o listri brezel a bez, dre n'eo ket bet dismantret o bro, a raje eur brezel nevez a lakafe neuze holl vadou Bro c'hall da vont da netra da viken.

Prestit d'an amprest ha pinvidikaat a reot. — Trec'hi a greun, n'eus ket eta eun tu bennak all evit Bro C'hall. Dre

hor c'halon eo, dre hon nerz eo e rankomp kaout divez ar brezel. Ha neuze, ho madou a vezo miret, hag en hor bro saveteet, danvez an holl, ho tanvez c'houi, va danvez me a gresko beteg ar binvidigez.

Mar fell d'eoc'h 'ta mirout hoc'h arc'hant hag hini ho pugale, roit ho tourn da Vro C'hall da veza treac'h, ha prestit bras d'an amprest! Ne ket komzou eo, mes traou, a c'hourc'hemen d'eoc'h hen ober!

(Miz Du 1917.)

TRIVET EMPREST

AVEIT

ER BREZÉL.

*« Éngorto mat onn é veemb lileuet get en
ol. Chom hemb prestein e vehé hirrat er
brezél, rak er vro en des dobér a argand
aveit gouni er viktoér. »*

(Konzeu en eutru KLOTZ, Ministr er Gouverneman,
é Kambr en Députéed.)



PARIH

MOULEREH ÉR VROH

—
1917

TRIVET EMPREST

AVEIT

ER BREZÉL.

*Ne gaveet ket amen konzeu flour,
mes treu spis ha splann!*

UR GIR KENT KOMANS.

Un dra vat é deviz ar en dra-zé. — Ol er guir Fransizion en des aveit on bro er garanté vrasan : er vaillantiz hemb par en des diskoeit hag e zisko hoah bamdé er beizanted kerkloüs èl en duchentil aveit dihuen on bro, er marù memb en des kavet ar en dachen brézel kement a dud é kreiz ou nerh, e laka er huirioné-sé de vout ker splann èl en hiaul. Goarnamb hi enta 'en don a hur halon.

A-dural, deustou ma omb prest de rein hun buhé aveit hun bro, jaujabl é ma lakei peb unan anchamb ol é spi de sellet a dort petra zou mat d' hobér aveitou ean-memb. Rak er Fransizion nen dint ket akourset de vout kaset ha degaset

èl lonned, mes èl tud. Ind e gerh, a pe vé displéget dehé èl ma faut perak é teliant kerhet, ha betag men é teliant monet. Nezé ind e rid... ha chetu penaus hun es gouniet er viktoér.

Raksé, aveit konz hiniù ag en Emprest, lauskamb a kosté er honzeu flour, ha devizamb èl marhadizion pé èl tadeu a famill avizet mat, hag e houi penaus 2 ha 2 n'ou des groeit biskoah nameit 4.

PERAK EN EMPREST MEN.

A fet en argand, petra é er vro a Frans? — Er hetan tra e helleet goulén genein e zou hanen : Perak er vro a Frans e gemér-hi argand é prest ha perak é kémér-hi 10 miliard?

Kent reskond, mat é, é kav genein, deviz petra é « er Frans ».

Frans, a dra sur, nen dé ket un dén é buhé, nag ur Gouverneman, nag ur lodennad tud benak. Frans e zou un hanù ur braù, a hanù, hag e vé laret a ol en dud ag er vro, ne vern più int; a p' hum gavant dirak treu hag e denn de vras, treu hag on sell rah, treu hag e vé gelllet laret anehé — a gaus d'er Brussiéned angoulet prest d' ou lonkéin — ; ret e derhel doh er vahé pé merùel. Chetu er huirioné é bèr girieu, n' hun es chet dobér a vout éngorto a nitra kin.

Rah ur ré aveit er réal. — A pe larér é ha er Frans de gemer argand é prest, ni e zeli enta komprenn en dramen : 40 milion a Fransizion, bras ha bihan, e reskond ag en argand-sé ar ou dañné. Mar prestet hiniù, nag é vehé meit 100 livr, d'er vro a Frans, d'er péh e hanùer er Gou-

verneman, rah er Fransizion, rah er madeu ag er vro e reskond o hous argand. Nen des chet dobér a vout én arvat hiniù (perak cherrein en deulegad d'er huirioné?) er Gouffians ér Gouverneman e zou diazéet ar madeu ol er Fransizion. Peb unan e brest d'en ol, hag en ol e reskond a argand peb unan.

Ha bremen, perak er Frans, perak er Fransizion e gemé-rant ind argand é prest?

Hui er goui kerklous él onn. Ni e gemér é prest — en Anglézed e gemér é prest hag en Amérikéned eùé — aveit prenein ha pééin en armaj, en dillad, er biùans, etc. e zou ret d'emb kavet eit gouni er viktoér, get sekour er ré e zou a du genemb, ar arméieu en anemized, hag en des hoant, m'er lar d'oh hoah ur huéh, d'hun lakat d'er marù pé de flastrein édan ou zreid él sklaved er ré anehomb n'ou devou ket lahet. Prestein argand d'er vro e zou enta rein armaj ha nerh d'er ré e zihuen er vro.

Prestein argand d'er vro e zou èné rein dorn d'er ré hum vél a brenein mil tra rekis aveit en dud ag er vro : lèr, bléad, ivl, sunk, gloan, café, gleu doar, coton, etc. Prestein argand d'er vro e zou hoah sekour er soudarded maheignet, er vugalé en des kollet ou zud, chetu azé devér brasan er vro a Frans é kevér er ré e zou bet goalauzet pé goasket dré er brezél.

Argand biù ha delé. — Goulén e hrér é prest 10 miliard. Aveit laret mat, er Gouverneman ne houlén ket argand é prest aveit kavet édan en dorn ur som ker bras. Nen des dobér meit a 2 viliard a argand biù. Get en achimant, get en 8 miliard aral, ean e venn *goarantein* en delé en des, de laret é ean e houlén get en dud degas dehon er

péh e hanter é gallek *Bons* hag *Obligations de la Défense nationale*, memb er péh ou doé prestet dehon guéharal a dri hantér dré 100, de laret é ur loden ag er péh e hanter en delé e ia hag e za. Ean e houlen ma veint troket doh er rant neùe-men a 4 dré 100. Un trok mat bras aveit en hani e brest hay aveit en hani e gemér é prest, pen dé guir er Governemant e gav en tu de béein er memb interéz aveit ur lod vat ag é zelé, hag a dural er ré e brest en des un nebed muioh a interéz ⁽¹⁾.

**PÉKEN TALVOUDUS É EN EMPREST AVEIT
ER RÉ E BREST.**

E hanù. — En Emprest Nasional 1917 en des un títir neùe hanter er rant 4 dré 100 (*pear dré gand*).

Vennein e hrér laret dré-zé penaus, pe breneeh en títir-sé 100 livr — pen dé guir é toucheeh 4 livr rant a vléad — hui hou péhé prestet hour argand a 4 dré 100.

100 livr, chetu er péh e tal en títir, hag er 4 livr chetu en interéz e zoug en títir-sé a pen dé guerhet er péh é tal.

En interéz e douch bremen er ré e brest. — **Ur gouni kaer.** — Mes en títir-sé ne tal ket bremen 100 livr, pen dé guir ne tal meit 68 livr ha 12 blank. Eit touchein aveitou

⁽¹⁾ En 3 dré 100, pe né prenet 60 livr, e zoug uigent ral dré 100.
Er *Bon de la Défense nationale* e zoug uigent ral dré 100.
Er 5 dré gand, pe né prenet 88 livr, e zoug deu skouid bihannoh 6 blank.
En títir neùe 4 dré 100, pen dé prenet 68 livr ha 12 blank e zoug 2 skouid bihannoh 3 blank.

4 livr rant a vléad, treu hoalh e vou tenein ag er ialh 68 livr ha 12 blank é léh 100 livr. Hui e brestou elsé hous argand nepas a 4 dré 100, mes a 6 dré 100 tostig (just 2 skouid bihannoh 3 blank).

Hag open, un doé e za, a pe vou deit en ézemant ér vro, en títir-sé e sahou a nobedigeu betag 100 livr ⁽¹⁾. En dé, sé, open ma hou pou touchet 4 livr rant pep plé, en 68 livr ha 12 blank hou pou reit aveit en títir en devou kresket paudmat, pen dé guir é hounieet 10 skouid hanter.

Aveit konz splannoh, mar gelllet prestein hiniù 10,000 livr, hui e douchou 583 livr a interez pep plé, hag open, en dé ma sahou en títir, men betag 100 livr, hui hou pou étre hou tehorn talvedigeh 14,577 livr é léh 10,000 livr.

Ne vou ket péet tauseu aveit en argand prestet bremen.
Ne vou ket chanjet en interéz anehou eraug 25 vlé. — Bezou hoah treu aral. Hui e reskondou d'ein marsé : « Chetu un dra kaer ha deviseu ag er choéj ! Mes ne gonzet ket d'emb ag en tauseu e vou ret pécin eit en argand prestet elsé. Mar dé ret d'ein peein 20 blank a dauseu aveit me 4 dré 100, ne douchein ket mui 2 skouid bihannoh 3 blank, ne douchein nameit 18 ral ! A dural, mar digoéh d'en títir, men sehel betag 100 livr, pé kentoh mar saù hoah ihuéloh, él és blé 1840, più e houí mar ne houlenou ket er Governemant, trokein en títir ha bihannat en interéz anehou ?... »

⁽¹⁾ Er blé 1830, er Governemant en doé keméret argand é prest a 4 dré 100. Er blé 1835, en títir e oé guerhet 100 livr, ha 107 livr ér blé 1840. Splann é de huélet enta é vé gelllet gouni mat é prestein argand elsé d'er Governemant.

Ne hoes chet doher a zotjein kementse, pen de guir er Governemant e hrata grons en nen dra-men : 1° ne vou ket lakeit tauseu ar er rant 4 dré 100; 2° ne vou ket troket en titr éraug 25 vlé.

Es é gout neoah é veet lausket de huerhein hou titr a pe gareet. Er Governemant ean e votu ret dehou er lezel 25 vlé el mé ma.

NE VOU KET KEMÉRET É PREST OPEN 10 MILIARD.

Er Governemant ne houlen ket hiniù open 10 miliard. Ne huerhou ket enta ag er rant 4 dré 100 open eit kementse.

Droed er Governemant é : mar hoes doher a gemér é prest get hou kamost ur péh a 20 livr, hañni ne hell hou lakat de gemér getou 40, 50, 100 livr, etc., ha de greskein elsé hou telé.

Mar ne houlen er Governemant meit 10 miliard, ol er Fransizion n'helleint ket enta kas dehou kement a argand el ma kareint? Ind e hellou er gobér, sur erhoalh, mes ur huéh ma vou achiù rah en treu, a pe vou kontet rah en argand, mar des bet prestet open 10 miliard, ret mat vou rein é lod rant de beb unan revé er péh en devou prestet : en hani en doé prestet 500 livr ne reséouou rant marse nameit aveit 350 pé 400 livr. En achimant a é argand e vou dakoret dehou aben.

En hani e zou éngorto a brestein ur som vat ag er guellan, e gav kalet a dra sur pe n'hell prestein meit ur som distér, mes petra gobér?

Ne vou ket parreit doh hañni a brenein rant, a 4 livr betag 300 livr. — A un tu, er ministr en des disklériet en

dra-men : er ré ne breneint ket open 300 livr rant, de laret é er ré ne reint ket open 5,145 livr, e vou lausket d'er gobér.

Ag en tu-ral, disklériet en des eùe : er ré e brenou hag e beou get er péh e hanùer é gallek *Bons pé Obligations de la Défense Nationale*, petremant get rant a 3 hanter dré 100, e vou lausket eùe de brenein kement a rant el ma kareint. Ne vou ket dakoret ou argand d'er ré-zé, nag é vehé cherret open, 10 miliard.

Erfin, chetu amen un dra hag e zisko splann pegement a hoant en des bet de lakat ol er ialheu bihan de vout lodek en Emprést.

Er Governemant ne reséu ket bihannoh eit 68 livr ha 12 blank, de laret é er péh e faut eit prenein 4 livr rant, mes ne faut ket kredein eit en dra-zé é ma ret prenein 4 livr ha 4 livr, hag elsé prenein aveit 8 livr, 12 livr, 16 livr rant. Hellein e hrér prenein aveit 20 rol, 2 skouid, 7 livr, 25 livr, 63 livr, etc., adal ma ne vou ket konzet o santimen.

En ol e hellou enta bout lodek én Emprést-men, memb er ialheu distéran, hag estroh eit un tad a familh e lakei é baur bihan de vout lodek é Emprést er brezél 1917!

ER RÉ NE BRESTEINT KET ARGAND D'ER VRO.

Frans e houlen argand é prest eit en dervet kuéh a boudé men de komanset er brezél. Chetu er papérieu staget doh er mangoérieu. Ol er Fransizion hag ind e brestou, bras pé bihan, er péh ma helleint? Nepas, a dra sur.

Er lod muian ag er Fransizion e zegasou d'er Governemant er péh on des de ziover, rak er lod muian anché e zou avizet mat hag e huel splann. Mes ur lodennig e chomou hemb

prestein blank erbet. Be zou émesk er ré-men deu sort tud : un dornadig tud goann a spered, hag ur vanden tud lan a zoujans.

Er ré getan e zegas chonj a var a dud klan e vé kavet en hospitalieu. Ne vern petra e lar er medesinour dehé, ind e gred mat penaus nitra ne ia d'en dias ag er péh e zébrant; chetu perak ind e chom hemb débrein bet ken ne varuant get en nan, kentoh eit hanauet dirak en ol, én ur zébrein, é ma er huirioné get er medesinour.

Digoéhein e hra er memes tra a pe né groeit un Emprest. Be zou tud hag en des argand de brestein, mies ind ou goarn geté, deustou ma houiant réh mat é hrehent vad d'er vro hag é tennehent ind. memb interéz kaer anché; ha kentéh ma huélant stagein papérieu un emprést neué, ind e cher mat ou ialh.

Petra zou, kanz? Rak ma hes marsé ér pen ag er vro unan benak hag e zisplij dehé, ha nen des chet er memb kreden, rak ma hes bet laret ur sorbien benak dehé. Hañni ag en dud digaz se nen des nerh erhoalh eit seul é zeülegad ihuéloh ha guelet penaus é ma Frans é, ha hi hembkin, e zou doh ou galbein hag é houlen sekour geté. Keméramb truhé doh-té.

Er loden aral e zou er ré eunus, er ré e zonz en amzér de zonet. Kleuet vant é laret : « En dén ne hoési ket petra e hell arriù. » — Mar vant aterset un tammiq, ind e lar dou-sig : « Elkent. . . pendehé Frans ha koll! . . . »

Laramb dehé a voéh ihuél en niù huirioné-men : er getan, mar da Frans ha koll, rah ou madeu, ne vern penaus é mant éngorto ag ou goarn pé ag ou huhein, rah ou madeu e vou kollet. Chetu en eil : Frans hag er ranteleheu deit a du geti e houniou a dra sur er viktoér, mar des en ol

pasianted, ha mar da peb unan de sekour é vro. — Ha, mar n'hell ket ou spered komprena giurionéieu ker splann, keméramb eùé truhé doh-té ha damb pelloh.

PENNAUS GOBÉR AVEIT PRESTEIN ARGAND D'ER VRO?

Chetu amen hé ber girieu rah er péh e zeliér gout a-zivout kement-sé.

Pegours é komansou ha pegours é klozou en Emprest?
